

394

## Guery Eliedic.

(216)

Eliedic, va merc'hic coant,  
 Comma fadet eo mont da Guery-ar-Stang,  
 — Guelloc'h eo ganen e qemerfac'h ur bal,  
 D'ant laqat beo ey douar,  
 Erit va c'hass da Guery-ar-Stang,  
 Da goll enor ur plac'h yaouanc.

Ma vije beo an neb em ganas,  
 Evel ma zeo an neb an magas,  
 Ne vijem get et da Berry-ar-Stang,  
 Hac e voutijem coll seiz, commanant.

Mes, siouas din, pa n'ey deo get,  
 Senti diouz lez-vam a so ret  
 Senti diouz lez-vam a so ret :  
 Da Berry-ar-Stang eo ret monet.

Pa vout o vont gant an hent-bras, (217)  
 Ur vreguic c'os a rancontras :  
 Gueguic c'os, din-me leveret  
 A belec'h e teuet, ha ma zet.

Deus a berry ar stang e teuàn,  
 Da glasq va zam boued mont a ran.  
 Ey Berry-ar-Stang pa ey doc'h bet,  
 Petra neverz oc'h eus clêvet.

Nemeus clêvet netra a neve  
 Da rapporti d'oc'h a dalle,  
 Nemet a, Autrou en e gampr  
 O tibochi ar merc'het coant.

Me vel Eliedic o tonet  
 Adreus dre ar parq balanec,  
 E c'horf a so ger moan ha clos,  
 Mont a rafe assur em bos. (218)

Ey penn ar Stang n'eo arriet,  
 Var an treujou eo n'ey laqet,  
 Hac eno chagrin e speret,  
 Gualc'h e c'halon e deus goelet.

Elied, commandet eo d'oc'h  
 Gant an Autrou pignat d'ay nec'h  
 Da ober dezàn e velle,  
 Ma yêlo varmàn da c'hourve.

Mar doc'h messenger dindannàn,  
 It d'ay nec'h ha lavarit dezàn  
 Mont da laret e ofern-bred;  
 Abars ma teujo e vo grêt.

Elied, commandet eo d'oc'h  
 Gant an Autrou pignat d'ay nec'h  
 Da zerc'hel dezàn ar goulou,  
 Ma lavaro e c'housperou. (219)

Mar doc'h messenger dindannàn,  
 It d'ay nec'h ha lavarit dezàn  
 Ec'h ell laret e c'housperou  
 Hep va c'haout da zerc'hel goulou.

Gantoloriou aour hac arc'hant

A so, me roar, en q'ar - ar - Stang,  
Cavet e vo re al gant c'hoant  
Da zerc'hel goulou merc'het coant.

Elied, commandet eo d'ec'h  
Gant an autrou pignat d'an nec'h  
Da zua d'ezan e voutou,  
Ma lagayo e bantouflou.

(220) Mar doc'h messenger dindannan,  
It d'an nec'h, lavarit dezan  
N'en don get deut da gwer - ar - Stang  
Da servichout da vevel camp.

Elied, commandet eo d'ec'h  
Gant an autrou pignat d'an nec'h,  
Ma yeloc'h gant an d'ar jardin  
Da zastum col ha louzon fin.

Mar doc'h messenger dindannan,  
It d'an nec'h ha larit dezan:  
Servicha noblanç me so bet,  
Biscoas gant autrou n'en don bet.

N'on bet biscoas ganto er jardin  
O zastum col na louzon fin;  
Jardinerien o devoa oll,  
Da zastum ha louzon ha col.

(221) Me va unay o dastumo,  
Mar des mad dean en o debro,  
Ha ma n'en dint get o lezo;

Ober rai evel a garo.

Trivac'h plac'h a so bet en rzi,  
Ha biscoas goerc'h neus et hini  
Nemedoc'h, Elied ar mad,  
So bet q'elennet gant ho tad.

Gant va zad n'on get q'elennet,  
Nemet gant ar Ver'hes beniquet,  
Pini ameus atao pedet,  
Louz hac ar sent ha sentezet.

Porcher, digor din - me an nor,  
Ma zin ermès gant va enor;  
Gant va enor ermès an ty,  
Trivac'h vloas so n'eus et hiri.

(222) E Montroulez, pe var ezro,  
Eliedic Mad, me ho caro,  
Ho cofed betec ho taoulagad,  
Brazes deus eur c'hapon benac.

Un den demeus va c'halite  
A vouifen erwad an eureuchfe,  
Sepet n'int get eus a v'elleg,  
Naden e pini ve abeg.

Teir habit neverz ameus bet,  
En honestis emeus o goneet:  
Unay so du, diu a so quenn,  
Ha va enor ganen ouспен.

fin.